

NANN
o deus lavaret
ar gebegiz

AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

UR SELL WAR AR BED WARDU AR BREZEL

gant Alan Heusaff

Ken fal eo deuet an darempredoù da vezañ etre ar Stadoù Unanet hag Unaniezh ar Soviedoù abaoe aloubidigezh Afghanistan ma 'z eus da zoujañ e vint kaset gant o mennadoù, o lorc'h, o ezhommoù kontrol, en tu all d'ar poent ma c'hallfent mirout ouzh o enebiezh a dreif en ur brezel nukleel. Ar renerien en daou du a oar emichañs pegen drouz-izevus e vefe an diskoulm-se evit an eil koulz hag evit egile. Petra bennak e garfent-int ober e ranker en em c'houlenn hag ez int douget gant nerzhioù ha n'int ket evit kontrollañ.

Evit ar mare ez eo diazezet ar peoc'h etrezo war gempouez an daou viraouac'h. Aon en deus pep hini da vezañ distrujet ma krog gant ar brezel. Met aon en deus ivez e krogo an tu all da gentañ. Gant re a aon e c'hell an den poellekañ bout trelatet, ne wel ket mui sklaer.

Ar pezh a dalvez evit kenreizhadoù bras a dalvez, kentoc'h meiz, evit an daou zrestgalloud bedel: mont a reont en-dro diouzh luskadoù ha n'eo ket o renerien evit terrif o lañs pe o eilhenchañ pa garfent.

Kemeromp da skouer prezidant ar Stadoù-Unanet. Brud dezhañ da vezañ un den deol, a-du gant ar gwirioù denel, o reif pouez d'ar selledoù buhezeg-ezhel. Bremañ e sav e vouezh kounnaret, hag e kinnig skeif. Gant peseurt nerzhioù ha pred-Briadennoù eo atizet? Ha kreñvoc'h eo alioù ar seurt gant Brzezinski eget re genseurt-ed Vance-Muskie? Daoust hag e ra a-ratozh-kaer gant an eil seurt hag egile evit kaout mouezhioù ar re daer koulz hag ar re habask, da vezañ addilennet? Ar bobl safset -ar c'hedveno- er Stadoù-Unanet a c'hortoz digantañ dieubif gouestlidi Teheran. An dud war ar straed e New-York hag er c'hériadennoù bihan e kreiz ar c'hevandir a sav enno un daerijenn vrogar o welout e talc'h ur vandennad diboell-

gredennerien penn ouzh o bro. "Nuke them": ra vo taolet ur vombezenn nukleel warno. "Gwazh a se evit ar ouestlidi. Gwazh a se ma respont ar Soviedoù gant bannadennoù etre-kevandirel. Gwazh a se evito. poent eo deskiñ dezho ur gentel. Lazhet e vo tud en tu-mañ ivez. Ret eo asantif d'an droug-se, un akt a buridigezh e vo...". Test eo an istorour Gordon Thomas da vezañ ur seurt imor e pep lec'h er Stadoù-Unanet (Irish Times, 03/05/1980). Hag e pelec'h emañ orin an dro-spered spontus-se? Dreistholl er programmou skinwel a vez arvestet bemedez-Doue a-hed eurvezhioù gant an dud. Ma pouez an dud-se war Jimmy Carter, piv eo o laka da soñjal evel ma reont? Perak e vo ar skinwel ur skeudenn distummet eus darvoudoù ar bed, ur menoz diwirion eus abegoù ar pobloù all, zoken kevredidi ar Stadoù-Unanet? Gant piv eo kontrollet pe leviet an National Broadcasting Corporation da skouer?

Er c'hamp soviedat, e vez tamouezhiet ar c'helaouadur en un doare dishefvel. Ar strollad a lavar d'ar genreizhad-kelaouif petra embann pe nann. Ar strollad a zo dezhañ ur mennad-blein: mirout hag astenn e c'halloud. Prest eo ivez da enstaliañ e zalc'hidi er broioù gwan ha d'o harpañ gant nerzhioù armet, dre zoareoù eeun hag ameeun: an Arme Ruz pe Kubaned. Seul dostoc'h ma vez an tachennoù strafuilhet d'o harzoù, seul vui e vez douget ar renerien soviedat e mellout. An digarez a roont evit bezañ aloubet Afghanistan -e oa goulennet o harp gant gouarnamant ar vro evit dont a-benn eus emsavidia zo par a-walc'h d'an hini a vez roet gant Bro-C'hall evit kas soudarded da sikour pennoù-bras en Afrika (hep ma fivfve ar C'hornog!).

Un digarez all ne vez ket meneget ganto hag a c'hell bezañ ken gwirion: o dije bet aon ec'h en em ledfe birvilh disparc'hel Afghanistan hag

Iran dreist d'an harzoù d'o d'o rannvroioù muzulmat. Ar bobl ne vez ket lavaret dezhi perak e fell d'ar gouarnamant amerikant boikotañ ar C'hoarioù Olimpek. Goulennet e vez ouzh gweladennerien eus Kornog Europa petra a zo troet e penn Carter pa 'z eo ken hegus e-keñver ar Soviedoù. Betekhen ne seblant ket e vez iset ar bobl a-enep an Amerikaned. Aes e vo atizañ he brogarouriezh evelato. Ar brasañ skoilh d'ar poell ha d'ar peoc'h a zo eta an diouer a anaoudegezh, an dic'houzvez ma talc'her ennañ ar pobloù.

Evit degas peoc'h e-lec'h brezel er Reter-Etre e rankfe an daou zrestgalloud doujañ youl pobloù ar rannved-se da vezañ dizalc'h ha diouzh o sevenadur. Bezañ prest ivez da zegemer ur rannadur eus an tireoul piaouet ganto ha d'e brenañ d'ur priz a ranko kreskif dre ma 'z ay an danvez war gozaf. Kavout andonioù energiezh all pe asantif da izelaat o live-bevañs (a rafe vad da galz Amerikaned da vihanañ). Kement-se a dalvez evit ar broioù diorreet holl. Met peseurt rummad renerien a zo hirwel a-walc'h ha barrek da gendrec'hif renerien ar c'hamp enebour, koulz hag o renidi o-unan, ez eo gwelloc'h mont gant an hent-se eget ken-

(Kendalc'h p.2)

Plabenneg

**Gouel ar brezhoneg:
re nebeut
a dud**

Plabenneg.- Tomm e oa an devezh ha laouen an dud. Gwir eo n'eus ket tu bemdez da dre men un devezh o kaozeal brezhoneg nemetken gant ur bern tud eus pep korn ar vro, gant kantadoù ha kantadoù a dud... Disul tremenet e oa, e Plabenneg.

Niverus e oa ar standoù ha kichen-ha-kichen e veze kavet holl diez-embann, kelaouennoù, strolladoù an Emsav, hep dishefvelerioù. Pep hini en deus displeget d'an dud pe hini eo pal e gelaouenn, ar pezh a vez kavet enni, diskouezet levrioù nevez embannet, an emzalc'hioù savet gant strollad-mañ-strollad war an dachenn sokial pe bolitikel. Dedennet-tre eo bet dre vras an dud gant ar standoù.

Gouren, kanaouennoù, c'hoariva, a bep seurt a draoù ez eus bet a-hed an endervezh, a oa hini diwezhañ ar gouel.

Koulskoude, a-du eo ul lod bras eus ar re o deus kemeret perzh en diskouezadeg, evit lavarout ne oa ket tud a-walc'h, nebeutoc'h eget er bloavezhioù tremenet. Me 'gav din ivez n'eus ket bet kement-se a weladennerien o tremen, ha kalz tud o devefe bet tu da zont n'int ket deuet e Gouel ar Brezhoneg.

Treuzet hon eus Bro Leon ha merzet hon eus e oa bet graet

(Kendalc'h p.2)

manifestadegoù disadorn ha disul e Plogo

GORTOZET E VO KALZ TUD WAR DACHENN AR GREIZENN

Disul e vo e Plogo un emvod bras aozet gant poellgorioù Breizh enepderc'hanel. "Bodadeg Vroadel ar Pantekost" eo anv ar vanifestadeg, hag e stumm ur gouel e vo aozet, gant divizoù, standoù, festoù-noz. Disul e vo dreistholl donedigezh an dañvadezed roet gant peizanted Larzac; ur c'hraoudeved a vo adsavet war dachenn ar greizenn da-zont.

D'al lennerien

Da gentañ, hon digarezit evit an niverenn diwezhañ a oa moulet fall. Ar mouler en deus graet e seizh gwellañ daoust d'ar benveg bezañ sac'het.

Da c'houde, e teu AN AMZER gant dale ar sizhun-mañ, en abeg d'ar c'hudennoù hon eus bet o tistreiñ eus Bro Leon, chomet traoù ar gelaouenn du-hont.

WARDU AR BREZEL

(Kendalc'h ar bajenn 1)
 derc'hel buanoc'h-buanaf wardu ur brezel hag a zistrujo ken sur ha tra nouspet kant milion a dud, ar c'henreizhadoù sokialour koulz ha kavalour ha marteze kement buhez diorreet war ar blanedenn?

Me a zo a-du gant ar re a lavar e tle Iwerzhon chom er-maez eus pep kevredad milour-

el. Ne welan netra da wennañ un trede brezel-bed. Gouzout a ran pegen skañv eo pouez ar re a zistaol ur seurt diskoulm diskiant da gudennoù ar bed. Met spi am eus e vo a-walc'h evit lakaat blenerien an ardivinkoù-brezel da boell-adif.

Alan HEUSAFF.

Gouel ar brezhoneg: re nebeut a dud

(Kendalc'h ar bajenn 1)

mat dre vras ar bruderezh, zoken e Brest (16 kilometrad diouzh Plabenneg). Perak ne oa ket tud 'zo deuet?

Pouezus e vez Gouel ar Brezhoneg al "lec'h" nemetañ ma vez posubl ur wech ar bloaz bodañ an Emsav en e bezh. E Gouel ar Brezhoneg ez eus tu da anavezout kresk pe zigresk hor yezh war bep dachenn resis ar vuhez pendeziek. Dre Ouel ar Brezhoneg e oar ma 'z eo dedennet an dud gant nevezadur ar brezhoneg pe get.

Setu perak eo pouezus an obererezhioù hag an diskouezadeg a vez kinniget d'an dud a-hed ar sizhunvezh. Strivadenn AN AMZER evit kemer perzh enni a zo bet bras ha pal skipailh ar gelaouenn abaoe an derou a oa bet troet wardu ar Gouel. Daoust hag e vo efedus? Ar pouezusañ a oa diskouez ar pezh a vez embannet an deiz a hiziv e brezhoneg, hag AN AMZER a zo ul lod eus-se.

Un devezh bras eo bet memes-tra, zoken ma vanke tud 'zo. Hag a-benn ar wech a zeu!

Mark SEURIALL.

berr-ha-berr

Marvet eo ur vaouez e-pad an noz etre digwener 16 ha disadorn 17 keit ha ma klaske hi terc'hel kuit eus prizon Roazhon. Troc'het he devoa barennoù ar prenestr ha graet ur gordenn eus al lienaj gwele met torret houmañ ha kouezhet ar plac'h.

A-benn ar fin eo bet didamallet an alvokad Choucq gant barnerien Roazhon (gw. A.A. niv.21) rak ne oa ket reizh ar stumm ma oa bet renet ar prosez.

D'an 2 a viz Mezheven e kemero ar c'huzul ministred divizoù evit harpañ al labourerien douar yaouank, dreistholl ar re a vez re a zle war o choug. Hervez an F.N.S.E.A. (sindikad pennañ ar gouerien), e vije ezhomm 9 viliard a lurioù da vihanañ.

Ar c'hentañ ministr eus Bro C'hall a gred start e vo peurnaetaet hon aodoù a-benn ar 15 a viz Gouere.

E Brest, ar vedisined-studierien e-barzh an ospitalioù (internes) n'int ket gwall kontant. Hervez eo distabl ("précaire") o statud ha tennspontus an doareoù da labourat.

E Skolveur Genwerzh Brest e oa bodet e-pad an dibern-sizhun tremenet ar strollad oñ koñversanted. Deuet e oa a-ratozh an Ao Charretier, ministr ar c'hoñvers anezhañ. Goulenn a ra gwraez artizaned ha kenwerzhourien kaout ar memes gwirioù hag o friedoù.

kelaouennoù

E-barzh AL LIAMM niv. 199 a zo deuet er-maez e lenner n'eo ket posubl kas ar c'houlmanantoù dre ar post e brezhoneg. Dija e vez graet evel-se evit AN AMZER ha n'eus nemet div wech ez eus bet adkasat ur skouerenn en abeg d'ar chomlec'h brezhonek. Perak ne vefe ket ar memes tra evit AL LIAMM?

Notomp ivez eo dudius-tre an niverenn-se, enni skridoù ur bern skrivagnerien anavezet hag evel kustumm an notennoù.

Hag arabat disoñjal Gouel AL LIAMM a vo aozet e Pondi d'an 29 a viz Mezheven da geñver 200vet niverenn ar gelaouenn. Un taol-dreist!

Deuet eo er-maez:

Pobl Vreizh niv. 123 (Mae 1980), Al Liamm niv. 199 (Meurzh-Ebrel 1980), Evid ar Brezhoneg niv. 152 (1 Mae) ha 153 (15 Mae), Wanig & Wenig niv. 133 (Mae 1980), Brud Nevez niv. 33 (Meurzh 1980), Imbourc'h niv. 124 (30 Ebrel 80), La Bretagne Réelle (e galleg), Gwenn-ha-Du (e galleg) niv. 18 (Ebrel-Mae 80).

sportoù

F.C. NAONED

E PENN

AR GIB

Sed, F.C. Naoned eo eta a zo ar c'hampion a veldroad eus ar lañ rummad. Ar bempvet gwech eo ez a ar maout gant skipailh ar gêrbenn gozh. Ur gopr kaer evit c'hoarerien Jean Vincent pa ouezer pegen diaes eo bet d'ar re velen kemer o c'hreñv er gevezadeg koulz hag e kib Europa e-lec'h m'o deus c'hwitet tostik-tost ouz ar pal.

A-hend-all, e vano Henri Michel e Naoned.

ABADENNOU MELLDROAD

-Rummad kentañ:
 Naoned 1/0 Marsailha
 Brest 0/3 Lyon
 -Eil rummad:
 Roazhon 0/1 Reims
 Gwengamp 2/1 Noeux les Mines
 Kemper 0/1 Rouen

ABADENNOU MELLZORN

Landerne 22/24 ASA An Oriant
 Saozon-Roazhon 25/28 Plougerne
 CFJ St Malo 17/15 Pilier Ruz
 FL Keryado 0/0 Gwitreg
 FL Lanester 27/25 Lesneven
 CPB Roazhon 21/25 AL Kemper

Kenskriverezh

e brezhoneg

Mar fell deoc'h kenskrivañ e brezhoneg gant ur paotr pe ur plac'h, skrivit da:

Skingomz ha Skinwel
 An Askol

Hent ar C'hastell Meur
 22820 Plougoussant

Lavarit diwarbenn petra a blij deoc'h ar muiañ komz.

A, skodenn vloaz da Skingomz Ha Skinwel ha goust 5 lur (ha 55 lur ma fell deoc'h resev "Breizh" e-pad ur bloavezh). K.R.P. (M. Capdevert) 557.28 N Roazhon.

en ur ger...

Ar Gebegiz o

vouezhiañ

NANN: setu an diskoulm goude an dilennadegoù e Kebeg. Nac'h-et o deus 60% eus annezidi ar vro ma vefe adsavet liammoù nevez etre Kebeg ha peurrest Kanada.

AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

BEP
 GWENER!

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
 35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek
 embannet gant DAZONT

Rener ar gelaouenn:
 Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

6 MIZ (24 niverenn):
 Reizh: 36 lur
 Studierien, skolidi: 24 lur
 Skoazell: 40 lur
 9 MIZ (36 niverenn):
 Reizh: 54 lur
 Studierien, skolidi: 36 lur
 Skoazell: 60 lur
 12 MIZ (48 niverenn):
 Reizh: 72 lur
 Studierien, skolidi: 48 lur
 Skoazell: 80 lur

KRP(): Roazhon
 CPPP 62319

Niver a skouerennoù moulet
 evit an niverenn-mañ: 1.000

bruderezh!